

(113)

## Disclarasion Quirion an Den.

Var ton : *Quechal pa voan den yaouanq, me a von.*

Setu ama, mignonet, labour ar Stadoù bras,  
Zo troet evit plijout d'an dud divar ar meas:  
Dirac Doue galloudus ez eo bet discrèryet,  
Evit sclêrat ac'hanoc'h rac na vezoc'h tromplet.

Articl genta.

An dud oll a zo ganet libe ha par er quirion,  
Rac brema e distriget an oll distiñsionou,  
Ma na vezont get fontet evit mad ar gomun,  
Pepr-hini a lavaro: opit, mes baleit eun.

2

Hon oll quirion natural zo un dra didermer;  
Hag o c'honservidig'ez a zo eur quir gourc'hemen.  
Al liberte, ar madou, hag o oll assurans,  
Ar surentez anezo, ha bigen nep grevans.

(114)

3

Pen-coz eus an oll c'hallout a zo bepret er bobl,  
Abaoue meur a gant vla zo laeret gant an dud nobl;  
Nep den ne ell exersi loden galloud er bed,  
Ma n'en deus get an oll bobl anezi consantet.

4

Al liberte birvigen ne renk noaz d'an nessa;  
Evelse peb den brema a ell sevel en e za;  
An oll dre 'r memes quirion, par dirac al lezen,  
A vero tranquilamant dindan e asqelien.

5

Al lezen a ell difen an accionou fall,

158

Ober ar pezh na lavar da zen ne eller tamal ;  
 Contraign neb den da ober traou n'int qet el lezen,  
 Eve coulbz deoc'h lavaret : non qet mestr d'am rouben.

6

Al lezen a zo mouez an oll quitibunan,  
 Ar memes e renk beza d'an oll ha da hep-unan.  
 Ervez ma vezint capabl verzo plaset an dud,  
 Ha nemet o vertuziou ne raint dezgo caout brud.

(115)

7

Den ne dle beza dalc'het nemet dre al lezen ;  
 Ha dez mui ne allo rei urzjou treset en e ben.  
 Destumet dre al lezen e sentoc'h oll dioc'h-tu,  
 Rac en em renta coupabl serten a rafac'h-hu.

8

Al lezen ne dle anzas nemet joanion arnad,  
 Anez ne eller punissa a ve bet great ;  
 Lezennoù rentet parfet araso an ofanson,  
 Na coier, na bourc'hisien na ellint mont abiou.

9

Peb den credet direbech aroc beza coupabl,  
 Na ve caret, goucoude, d'e zestum un dra renabl ;  
 Ar fesonion rigourus evit-ha hep ezom  
 Dre 'l lezen vezint goanet gant eur garventez tom.

10

Arabat e caoud nec'het gant ompinionou,  
 Dre na deuint qet scleramant a enep al lezennoù ;  
 Doue en deus pardonet memes d'ar Juderien,  
 Ne ve qet mez evidomp na deufent Christerien ?

(116)

11

Roidig'ez libramant eus ar pezh a zontjeur  
 A zo eur quir presius d'an den, heb deiz ha heb heur ;  
 Evelse 'eller parlant, scriva, len ha monita,  
 Gant dalc'h da respont ive eus an droug, m'en en ra.

12

Quirion an den a c'houlen caout eur nerz public

Evit o goarantissa diouc'h greverez loundiq ;  
An nery-se a zo savet da avantach an oll,  
Hep trei bigen ouc'h hini a rafe stad d'o coll.

13

Mes evit antretoni nery publik eus ar vro,  
Hag evit an dispignou a renk da ober ato ;  
Eo ret ingaliza lod pep hini a c'hal,  
Ma vezo danvez pe oll moyenou all.

14

(117) An dud oll a ell guelel ha gouzout o-unan,  
Pe dre o reprezantet, tom evito evel tan,  
An necessite merget d'ar goutribusion,  
Ha da heulia e implich, evel just ha rezon.

15

Ar bobl en deus veritabl ar quir da c'houlen cont  
Diouc'h tud a afer-publik eus o diner prest ha pront ;  
An arc'hant en o daouarn zo laqet gant an dud,  
Evit sicour o breuder nint get d'ar vro chas yud.

16

Ar bobl n'ey deus er quiriou nep goarantissamant,  
Na merget an disparti eus an oll gouarnamant,  
N'ey deus get eur quir lezen statudet na gret mad ;  
Mes ar Fransisien brema o deus lezen eur tad.

17

Eur mui chans lezen eur tad curunet gant Roue,  
A lavar d'e val : bonit en o ti par d'ar Roue.  
Ne vezo mui gemeret madou den da bae ;  
Ar pere'henniach anezo a zo sac'r dreist peb tra.

fin.